

bremañ

DIWAN enket

Thomson : netra diskoulmet
Letvia : ur bobl disoñjet



Etre dec'h hag arc'hoazh ...

Nevezik 'zo e oan em gavet gant tud An Here e-pad ur staj brezhoneg aozet gant Stumdi 'barzh ar Skolaj Roparz Hemon e Brest. Ne oan ket ma-unan dre ma oa bet pedet an holl stajidi ganto da zizoloñ an ti-embann ha da ziskouez deomp petra a vez o labour pemdeziek. Kaoz ez eus bet ganto eus al levrioù nevez embannet hag ivez eus ar fichennaeg urzhiataerezh emaint o sevel, ennañ an holl c'herioù brezhoneg anavezet. Diskouezet eo bet deomp labour ar re a oa o sevel ar geriadur hollvrezhonek a yelo er-maez a-benn bloaz. Ma'en 'zo d'ja da rakprenañ (!). Seul vuioch a dud o rakprenañ ha seul aezetoc'h labour tud An Here. E dibenn ar staj ez eus bet roet deomp gant tud Stumdi ur follenn-vruderezh diwar adsavidigezh ar gelaouenn "Evit ar Brezhoneg". Ur gelaouenn evit ar re a vez o teskiñ brezhoneg pe a faot dezho kompren brezhonegoù ar vro pe c'hoazh ar re, brezhonegerien a-vihanik anezho, a faot dezho deskiñ lenn o yezh.

Lizher Ti Ar Brezhoneg

Goañvet a-walc'h en deus Ti ar Brezhoneg, ha tremen poent eo dezhañ divorfilañ a-raok ma vo deuet mare an dibunadegoù bras war-zu ar mor, an heol hag all ... Klasket 'vo neuze gant T.A.B. tennañ gounid eus ar fed ma 'z eus eus dibennoù-sizhun miz Mezheven reoù ordinal anezho (da laret eo gant daou zevezh hepken) evit bodañ e izili en-dro ha kinnig dezho abadennoù sevenadurel ha dudius war un dro. D'an 8 a viz Mezheven da 4e30 g.k. : Skignet e vo war ar skramm bihan pezh-c'hoari Tangi Malmanche "Ar baganiz" a oa da vezañ diskouezet deoc'h d'ja daou pe dri miz 'zo. Tu 'vo deoc'h ivez ober gwelloc'h anaoùdegezh gant testienn "Ar Bagantiz" en ur amprestiñ al levr, embannet e ti "Al Liamm", hag a zo bet prenet nevez 'zo gant T.A.B. evit e levradoeg. D'ar 15 a viz Mezheven da 4e30 g.k. : Dont a raio Yann-Fañch Kemener, kannad hollvrudet hor sevenadur hengounel, n'eo ket da ganañ avat met da reiñ keloù deomp eus al labour emañ o seveniñ evel kuzulier e departamant Penn ar Bed e sell da reiñ lañs d'ar brezhoneg er rann-se eus hor bro. Postet 'z eus bet 300 000 lur d'ja gant departamant Penn ar Bed evit kas labourioù 'zo da benn hag en o zouez hini ar panelloù-hent a zo o paouez bezañ "advrezhonekaet" pe brezhonekaet end-eeun.

Kenvioz ker.

Setu amañ foto timbroù kentañ Bro-Litwania. Embannet int abaoe daou viz evit dez an dieubidigezh, d'ar 16 a viz C'Hwevrer. Pa weler se, me soñj ez eus war un tu muioc'h a frankiz gant un RSS (Republik Sokialour Soviedel) eget gant ar rannvroioù gall : posubl eo dezhi d'en em ziskleiañ dishual hag emren, un RSS a c'hell embann timbroù broadel, ar pezh ne c'hell ket bezañ graet er vro dimp-ni. A wir galon, B.L.



(Foto Frankfurter Allgemeine Zeitung)

Lennet eo bet e meur a gelaouenn

e oa bet krouet ar gevredigezh DREMMWEL er Morbihan gant an A.P.E.E.B. ha tud all. En em vodet e Rostren d'an 8 a viz Mae, e fell da vurev an APEEB adreiñ da c'houzout : - ne gemer ket perzh er gevredigezh-se - ne labour betek-hen an APEEB nemet war dachenn ar skolioù publik.

Diwan Naoned

Evit klokaat he skipailh implijidi a ra war-dro mont-en-dro an ti ha war-dro ar vugale, emañ Skol Diwan Naoned o klask evit distroskol miz Gwengolo 91 un objektour (pe ur C.E.S.) brezhoneger (pe kroget mat d'ja da zeskiñ ar yezh). Kas (ar buanañ ar gwellañ) ur c.v. da Jean-François Guilloulec Diwan Bro-Naoned, 104, hent ar Jonalrière, 44300 Naoned (☎ 40 57 37 56 goude 7e noz).

Dazont du evit ar skolioù brezhoneg Diwan enket

Bloaz zo, pa oa bet sinet un emglev etre Diwan hag ar Stad, da heul ur stourmadeg hir, e soñje kalz tud e oa deuet an trech da vat gant ar skolioù brezhonek. Amzer a vije hizviken da soñjal muioc'h er gelennoùiezh, gwellaat ar skolioù e pep keñver ... Ha setu

ma klevet kaoz a nevez a gudennoù arc'hant gant Diwan. Kudennoù a c'hellfe lakaat Diwan en arvar da vat. Deuet e oa Andreu Lavanant, gant tud all eus Burev Diwan, da zisplegañ saviad Diwan d'ar gazetennerien e Roazhon d'ar Gwener 24 a viz Mae.



Izili Burev Diwan o renañ kont eus stad ankenius kef Diwan d'ar gazetennerien -

Dic'hounid

Erwirionez pa oa bet sinet an emglev gant ar Stad e oa sklaer da reneñ Diwan ne oa ket tu da gaut gwelloc'h d'ar mare-se met ne ziskoulme ket an holl gudennoù ivez, pell a-se. Diwar ar 56 post-labour da vezañ kemeret e karg ne oa bet dalc'het kont nemet eus 51,5 post ... Hag evit ar re-mañ ne oa nemet 78% eus ar gop kemeret e karg. Ret da Ziwan eta kavout an arc'hant evit klokaat ar goprou. Ha ger ebet kennebuet an emglev diwar-benn ar stummañ, ar prenañ darvez-skol, ar rebeun ha. Pa ne oa ket Diwan evit soñjal chom a-sav da vont en-dro en un doare reizh ha da glask mont war-raok breped, e oa un dic'hounid bras da zont. 2,9 milion a lurioù dic'hounid a vo e 1991 ... Ma ne vez kavet diskoul ebet, e vo 5 milion dic'hounid e 1992, ha 6,5 e 1993 ...

Hent an denkañ

Tri franted a zo bet betek-hen e diorroadur Diwan. E-doug an hini kentañ e chome distredik ar pep brasañ eus ar Vretoned. Piv distredik stourmerien c'hredus o dije gallet kas o bugale d'ur seurt skol. An eil franted a zo bet hini ar Gevrat Eeun (lezenn Dabré). N'eo ket bet gwall vat evit Diwan. An trede franted erfin a zo bet hini ar c'hlsk war-

lerc'h ar c'henstagañ

Bezañ kenstaget da vat, lonket, ne vo ket un dra vat kennebuet. Kalz re beut eo an Deskadurezh Stad evit reiñ bod da hentenn Diwan hep klask he mogañ. Petra d'ober neuze ? Pa n'eus ket tu da genlabourat war diazezoù dereat gant ar Stad e vo klasket en ober gant ar Rannvro. Klasket e vo kenderc'hin politikarier an Rannvro ez euz un "diazezadur foran a interest rannvroel" eus Diwan ... Pouezet e vo war ar pouezus m'eo gwazañ ha dioren hevelebiezh ar vro evit reiñ kalon d'ar Vretoned da stourm evit gelout labourat hep divocañ, evit denennañ granterierien estren a blij dezho diazeañ e broioù e lec'h ma kavont tud startjienn enno ... Ha kenderc'het e vo an Ao. Bourges ? Ha dare eo da gompren n'eo ket koll arc'hant a rale ar Rannvro en ur gemeret muioc'h Diwan e karg ? Teir skol nevez a zo da vezañ digoret ar bloaz a zeu : Loudieg, Sant-Nazer ha Baod. Ne vint digoret nemet ma teuer a-benn d'o lakaat da vont en-dro gant an emarchantañ avat. Pelec'h emañ "la luitte en avant" a glevet komz anezhi amañ hag ahont ? 150 000 lur ar bloaz a ranker kavout evit lakaat ur skol da vont en-dro ...

Petra a c'hellit ober ?

An dra gentañ a c'hellit ober eo lakaat Diwan da vezañ anavezet gwelloc'h gant an dud a zo tro-dro daoc'h. Un nebaud taolladoù a zo bet priantet a c'hellit goulenn en ur gas 30 lur da vurevioù Diwan e Treglonoù (29870). Pouezusoc'h eget biskoazh eo a-hend-all kenderc'hel da reiñ arc'hant da Ziwan. E-tro 2500 den a ro arc'hant da Ziwan hiziv. Lakaat kreskiñ ar sirf-mañ zo d'ober evit ma vo anat d'ar bolitikourien ez eus muioc'h-mui a Vretoned a-dreñv d'ar skolioù brezhonek. Teir skol nevez a zo da vezañ digoret ivez ... Skirvan d'an dilemmidi a c'hell bezañ takvoudus ivez. Goulenn ma vo, a-benn ar fin, ur statud stabil ha reizh evit Diwan.

Dont d'ar vanifestadeg a vo aozet e Kemper d'an 22 a viz Even da 3 eur, asambles gant Unvaniezh ar gelennerien Brezhoneg, a vo d'ober ivez mar fall daoc'h embann fraezh eo poent echiñ gant an hanter-ziskoulmoù. Per al Lez

Gwerzh d'an uhelañ diner e Kalmez Ar vretoned er-maez

16 000 lur gall eo bet gwerzhet ti ar re Wern e Kalmez e-tal d'ar Roc'h-Derrien, a-benn paeañ an 18 000 lur a dieñt d'ar Sofinco (kevredad kred).

Priz kentañ ar werzh a oa 15 000 lur, doare-ober spontus ; boutin avat. Betek 16 000 lur e kreskas ar priz a-drugarez d'ur familh saoz a reas he mad eus an degouezh. Petra a c'heller soñjal a-hend-all eus an dud-se a lamm war gwalleur ar re all a-benn piaoñ ur sweet home en ur vro ma vez brudet he hin, he stouled, he zud dioule-o-unan gant ar burevioù-kouraterezh. A-bep broez, evned-preizh. Ha n'eo ket reizh mogañ e vorchedoù en ur gevredigezh a vez brudet ganti perzhioù-mat an Hiniennegezh ? Ma ... Gwerzh et voe an ti e miz Gwengolo tremenet dirak lez-varn Gwengamp. Kelaouet e voe an Itron Le Guern e miz Kerzu nemetken.

Tan

An darvoudoù az eas fonnusoc'h avat pa voe e soñj an Gantlemen Farmers d'ar c'hel an ti da vat a-benn an hañv, of course. Sede an Itron Le Guern hag he seizh bugel rediet da zilojañ. Ewel-se e vefe bat kont mar ne vefe ket bet eus ar mediaoù. Dreze e vo feuket ar boblañs, emsevel a raio an amezelen : "Mar diskouez ar saozon o fri e vo peget an tan en ti !". Bleuniañ a ra luganicù Tan-Tan-Tan er vro adarre. Kement a droez a zo ken e teu en-dro da soñj ar velourien ha pennoù-bras all o deus un ene ha mouezhierien, ha sede an divizh a argasidigezh bet daleet ! Da vezañ heulit... Bonjour deoc'h tud an ti-mañ !



Thomson Brest Goude bezañ dalc'het al labouradeg e-pad 31 devezh. Adkreññ gant al labour ...

31 devezh e oa bet dalc'het Kreizenn Thomson-CSF Brest gant an implijidi. D'ar 16 a viz Mae e oa bet divizet ganto dieubiñ al lec'h. Kevraouet e vo c'hoazh avat. Ar CFDT, sindikad kreñvañ an embregerezh, a glasko difenn ar 198 post-labour en arvar, unan hag unan.



Ur pennad a oa ne oa ket bet klevet anv eus ur stourm o liammañ en un doare ken anat ar youl da zifenn an implijou gant ar c'hoant, kinnet evel ur gwir, da vezañ e Breizh. An implijidi ne oant ket bet evit degemer ar steuñv sokial oc'h enderc'hel lamedigezh 198 post-labour ac'hann da zibenn ar bloaz. Adalek ar 16 a viz Ebrel e oa bet diskroget aliesoc'h-aliesañ diouzh o labour gant an implijidi. Goulenn a raent, gant ar CFDT, e vije lamet ar postoù-labour war ur prantad a dri bloavezh.

Ar c'henstourm war washaat Tamm gwellaenn ebet ne oa o tont gant an amzer o tremen. Pennadurezhioù a bep seurt o devoa klasket lakaat an traoù da vont war-raok. Tra nemet un dornadig implijou saveteet, ur pennadig gourez gounezet evit re all... Dre ma ne zeue diskoulm ebet e savas muioc'h a vech a-gevred-holl. "N'on ket evit breutaat gant tud a ra ur gouestlad eus ar benveg-labour" eme Bernard Angotti, rener ar greizenn. Goude bezañ dalc'het al labouradeg e-pad ouzhpenn ur mizvezh e krogse an implijidi da goll kalon. Poent e oa d'ar

CFDT cheñch doare-stourm. D'ar 16 a viz Mae, miz goude bezañ votet an dalc'hidigezh, e voe mouezhiet adarre. 82 % eus an harzerien-labour a votas ar goude gant an diachubiñ, 95 % anezho a save a-enep krenn da ginnigoù ar renerezh ivez avat.

Netra Diskoulmet

"N'omp ket bet trec'h ar c'hrogad kentañ" eme Bernard Anser, sindikadour el labouradeg. "Hanter-kant den az aio kuit d'ar c'hentañ a viz Here. Tud lakaet e-maez ar gevredigezh pa fell d'an ti-mañ kaout an dizober diout. Tammoù traoù hon eus gounezet ivez avat : ar re a zo ardu da vont kuit a youl vat a c'helloc'h lakaat o anvioù war listennoù adarre hag un nebeud implijou a zo bet saveteet." Diaes-kenañ e vo ar gevraoueg. Mennet-start eo Bernard Angotti ha n'emañ ket e soñj plegañ. Disoc'h ar c'henstourm a vo ivez marvat diouzh ar genskoazell a gavo implijidi Thomson er vro.

Andrev ar Bras Genrou : kevraouñ : négocier, kenstourm : conflit, Gourez : sursis, kevraoueg : négociation.

Andrev ar Bras

Breizh-Kembre Baradoz al labour-douar ?

Daouzek studier eus IREO (skol teknikourien al labour-douar) Plerin o deus tremenet teir sizhunvezh e Bro-Gembre oc'h ober anaoudegezh gant labour-douar ar vro-se.

Distro int souezhet-meurbet gant an doareoù-labour o doa dizoloet e Keltia tramor : labourerien-douar pinvidik, war antoù ledan o zachennoù hag ostilhet mat ; an holl broduadur gwerzhet e-diabarzh ar vro, gant nebeut-tre a sindikadoù ; CUMA ebet pe dost, nag implijad kennebeut, ha koulskoude ur vuhez kevredigezhel pinvidik-mor ...

Diwar geot hepken

Produet e vez dreist-holl kig-dañvad ha bevin, ha laezh, diwar geot hepken ; ne vez ket implijet boued sec'h na maiz ha n'eus uzin boued-chatal ebet. Gwerzhet e vez al laezh 5 lur al litrad, ha dre ma vez dister a-walc'h ar postañ arc'hant e vez bevet mat-tre diwar an douar e Bro-

Gembre (3% eus al labourerien hepken a zo diwar ar maez e Bro-Gembre)

Ur rebech

Hogen ar pep dedennusañ eus ar pezh a zo bet dizoloet gant ar studierien eo buhez ar baizanted goude an devezh-labour : kluboù rugbi, lazou-kanañ pe strolladoù c'hoariva a vez kavet kalz, renet gant ar re yaouank. Beajñ a ra kalz ivez labourerien-douar Kembre. D'an Izal-Vroioù, da Vro-Canada ha d'ar Stadoù-Unanet ez eont. E Breizh ne vezont ket gwelet kalz evit ar mare : tamallet ez eus bet ouzhpenn padtrud yaouank skol Plerin bezañ disorjet bezañ Kelted ha bezañ dilezet o yezh !

Yann an Douar

Tro-Breizh

Tud diwar ar maez

Bep mañ pevar stourmer breizhat o paouez sevel ur gevredigezh, "Tud diwar ar maez" hec'h anv (Prizidant : Herve Peron, Besprezidant : Yann Puillandre, Sekretour : Thierry Barailier, Teñzorier : Jean-Jacques Homier). Ur greizenn diouren war al labour-douar ha bed ar maezioù e Breizh eo ar gevredigezh-mañ. E ti ar gevredigezh e kavoc'h da skouer fichennnaouegoù evel ar remañ : "Al labour-douar e "Le peuple breton", "Al labour-douar e "Emgann", "An Ekologiezh e "Le Peuple Breton", "An Ekologiezh en "Emgann", dielloù a-bep seurt diwar-benn ar goproù war ar maez, distumadennoù pennadoù a-zivout Alstus Gourvenec, titoroù niverus diwar-benn gounidegezh-boued Breizh, ha traoù all ...

Evit gouzout hiroc'h skrivañ da "Tud diwar ar maez", Bod Bihan, 29690 Ar Foulichez. Un diskouezadeg diwar-benn stourm ar Gurd, kensavet gant "Tud diwar ar maez" ha Kan an Douar a c'heller mont da welet er mare-mañ e ti Kan an Douar, Presbital kozh, Landelo.

Roazhon : war baper adimplijet e vez moulet "Le Rennais" (107 000 skouerenn) abaoe miz Ebrel a-drugarez d'un emglev gant ur greanti toaz a vro-Elzas, e Turkheim. 30 000 ur arboell a vo hivizken dre niverenn.

An Oriant : Digor eo al linenn dezougen marchadourzh An Oriant-Gijon (Asturia) abaoe miz Ebrel. Gant al lestr-karg "Atlantica" e vez darempredet teir gwech ar sizhun, evit un 20 eurvezh bennak an draizhadenn-pad. A-barzh bloaz e c'hellfe al linenn-se servij da zezougen tud ivez.

Douarnenez : Ali-Kenn eo M. Matzger gant ar raktres a lakfe ar "Porzh-Rhu" da "porzh-mirdi biñ an hengoun" a-benn miz Gouere 1992. Komiser e-karg eus an enklask foran a zo bet e-pad daou vizvezh e hemañ. Kregiñ a raio al labourioù e miz Gwengolo, hervez. O c'hous : 89 milion lur.

Paoul : Ar c'hlevredad evit brudañ mennozh ur Skol-Veur e Kreiz-Breizh a zo bet savet eno. 103 mennad a skoazell eus perzh maered 16 kanton Kreiz-Breizh a zo gantañ. Maered Karaez, Rostren, Gourin eo prezidanted d'ar chevraded. E Groñvel e vo ur fest-noz skoazell d'an 8 a viz Even. YVT

Brest : ul linenn evit ar Brezhoneg e-barzh bujed kêr Vrest. Divizet eo bet ezefe 70 000 lur evit kas war-raok ar Brezhoneg e Brest ar bloaz-mañ. An arc'hant a yafe da lakaat panelloù divyezhek e kêr ha da lakaat un ti evit ar Brezhoneg da vont en-dro. Gortoz a reer bremañ e kreskefe ar sammad-se a vloaz da vloaz.

Klasoù divyezhek

E skolioù prevez Penn-ar-Bed ez eus anv da zigeriñ 5 klas divyezhek brezhonek-gallek, a-benn miz Gwengolo 1991. E Bro-Leon eur sur e vo krouet hevelep klasoù e Kleder, e Plabenneg hag e Brest (Skol ar Groaz Ruz). E Bro-Gernev ne vo nemet daou gias : e Kemper hag e Karaez.

Endro

Ar Gwilun saotret

"N'hallomp ket ken embleustrañ war ar Gwilun e Roazhon", eme Jean-Yves Prigent, kuzulier teknikel evit ar sportoù, "gant an hidrokarburoù flærius a vez warni". Gwazh a se evit ar sportourien a live uhel, roeiferieren ha kayakerien a oa bet pedet gantañ da Roazhon d'en em c'h'haoudniñ a-benn ar C'Hoarioù Olumpek. "25 bloaz zo e teuan amañ, ha ne ra an traoz nemet gwashaat. Ne fiñv ket tud an ti-kêr na difennourien an endro. Ne vez ket gwelet melldroaderien ar "Stad rennais" oc'h embleustrañ war ur bern teil !"

Treburden, Douarnenez ha bremañ Plougerne

Ur raktres porzh-bageerezh ouzhpenn. Al labourioù evit porzh Treburden a zo bet lakaet da chom a-sav betek miz Gouere. E Plougerne eo e sav bec'h bremañ, e hanternoz Breizh, tro-dro d'ur raktres porzh-bageerezh dour don. Kevredadoù difenn an natur a zo savet a-enep ar porzh-mañ hogen ar Maer a zo memmet start diouzh e du ivez da lakaat e raktres da zont da wir, ha pa vefe ret mont dreist d'ar skolioù melstradurel.

5000 den e Karaez

Gouel Broadel ar Brezhoneg 91

5vet gouel broadel ar Brezhoneg a oa e Karaez d'ar 17-18 ha 19 a viz Mae. Deuet e oa ur bern tud eta d'an emgav bloaziek daoust d'an amzer fall ha yen



Deomp-ni eta da vezañ stourmerien ar pemdez ivez, ar re a c'houlennno da gaout gwir da ober gant o yezh e kement degouezh eus ar vuhez, ar re a groue un amzer da zont frank evit Bretoned warc'hoazh.
Kemeromp perzh en holl stourmoù bras, evit ar c'helenn e brezhoneg, evit ar skitwel e brezhoneg, evit ar brezhoneg war an hentoù hag er vuhez foran.
Met bemdez kademaomp hor gwinoù, war ar stradae, en tiez-kaer, en ti-post, er skol, al labouradeg, e kement lec'h ma vez nachet ouzimp bezañ Bretoned, e kement lec'h ma vez nachet ar brezhoneg.
Bezomp stourmerien leun amzer !
Bevet an dieubidigezh vroadel ! Bevet ar Brezhoneg ! Bevet Breizh !
Sul 19 a viz Mae 91

Diorren kelenn ar yezh eme an dilennidi

D'ar Gwener 16 a viz Mae e oa en vodet e Karaez dilennidi eus 4 departamant eus Breizh (eus Bro-Roazhon ne oa deuet nemet ur c'hargad) evit keñveriañ al labour a reont evit skoazellañ ar c'helenn brezhoneg.
1,8 milion a lurioù a ro departamant Penn ar Bed d'ar Skolioù Katolik ha 700 000 d'ar skolioù-stad evit kelenn ar brezhoneg. Ar re all ne reont ket hanter kemend-all.
Divizet e voe gant an dud goulnid digant ar rannvro reiñ skoazell-archant ha sevel un enklask war stad ar c'helenn brezhoneg e pep departamant. Fizet e vefe al labour-se er skol-veur. Diwar al labour-se e vefe divizet penaos gwellaat kelenn ar yezh "en holl sistemoù" : skolioù prevez, skolioù-stad ha Diwan.

Tud ankouaet

Kement-se a dalv da laret ne vo ket skoazell kelenn ar yezh eta er skolioù-noz hag er stajoù savet gant an emsaverien, ankouaet ma vezont alies gant an dilennidi. Ma vefe b'rivaj da sevel us sistem kelenn evit an dud vras heñvel ouzh Diwan (un Diwan-B), e Breizh hag e pep departamant, e vefe aesoc'h bout anavezet gant an dilennidi ha bezañ skoazelllet ganto.
N'eus nemet "Skol an Hantemoz", e Bro-Dreger, a zo anavezet gant an departamant, hag a zo skoazelllet gantañ. Peur e vo graet kement-d-all er pevar departamant all, ha savet un aozadur broadel ? Kemend a skoldi ha Diwan a gavie buan ha kemend a skoazell a c'halle goulnid.
Alan Soubigou

Diskleriadur Emgann ha Stourm Ar Brezhoneg

"Abaoe pell e oar ar Vretoned ne dalv ket da galc'h kiemm ma ne vezor ket prest da stourm.
Abaoe pell e oar an holl a glask lakaat da anavezout gwirioù hor pobl ha gwirioù he yezh ne vo doujet d'ar gwirioù-se nemet goude stourm hir ha kalet, goude en em oustriañ hep tarmal en emgann.
Ne ray ar Stad C'Hall nemet diouz ma vo rediet da ober.
Re hir e vije distreiñ amañ war kement gaou a vez graet da Bobl vreizh, d'he Yezh ha d'ha sevenadur, kement promesa a vez ankouaet, kement laoi evit chom hep doujañ gant hor mistri c'hall evit chom hep doujañ da wirioù broadel Breizh. Ha koulskoude ez a an traoù war-raok, ha koulskoude e vez ledanaet tachenn ar yezh, ha koulskoude e vez kresket emouezh ar Vretoned ouzh pinvidigezh o yezh hag o sevenadur, ha koulskoude e vez gounezet gwirioù bemdez.

Ha kement-se abalamour m'o deus gouezet ar Vretoned sevel o skolioù, abegij start war o goulnidnoù, krouñ ar vuhez reiñ da zerc'hel ar Brezhoneg en e sav. Fall omp c'hoazh da vezañ trec'h, pell omp c'hoazh a wleat ar Brezhoneg lakaat da yezh ofisiel e Breizh, pell a lakaat ar Brezhoneg da dalvezout da yezh vroadel Breizh, da vezañ tra an holl Vretoned.
Met tostoc'h a se e vimp pa ouimp stourm kalet ha kreñv.
Bez e rank bezañ ar stourm tra an degouezhoù meur, ar manifestadegoù, an emgannoù bras ; met bez e rank ivez bezañ tra ar pemdez, tra an degouezhoù bihan.
Bemdez e vez nachet ha gwirioù da bobl Vreizh. Bemdez e vez lakaet ar Breton da blegañ ha da ankouaet ez eo breton.
Bemdez e vez kasket mogañ, lazhañ hor bro.

Emvod-bloaz Yaouankizoù Europa Pesurt dazont e 2000

Etre an 20 hag ar 26 a viz Ebrl eo bet kenstrollet tud eus Europa a-bezh e Breizh
Skosiz, Estoniz, Korsikiz ... etre tout ouzhpenn kant a dud yaouank deuet eus seizh avel Europa o deus en em gavet e Plafvour, ar gêr dibabet gant emvod-bloaz Yaouankizoù Kevredad Poblou Europa (JCEE), hag a zo bet savet a-ziwar an UFCE (Union Fédéraliste des Communautés Ethniques Européennes).



Dileuridi ar broioù deuet da breñtñ ar c'hendiviz e Roazhon

Dibabet oa bet an danvez : "Ar pobladou hag an darempredoù etrevroadel a-nevez", ha diwar-se ez eus bet 6 danvez-studi ha prederiañ ha da bledin ganto e-pad ar sizhunvezh.
Da gentañ, petra eo ar pobladou, ha klasket eo bet displegañ pegen disheñvel eo an traoù hervez ar vro, hag ivez perak ez eo ezhomm da gaout an aozadur evel ar JCEE.
Ar cheñchamantoù a zo c'hoarvezet nevez 'zo en Europa ha labourioù Kuzul ar Surantez hag ar C'Henlabour en Europa a ziskouez ez eo ret-mat kaozael diwar-benn dazont Europa, met pesurt Europa an hini eo a vez komzet anezhi ?
An trede strollad-labour en deus pledet gant an aozadurioù etrevroadel a justis a cheilenn e darempred ganto pa ne zeñ ket a-benn ur boblad tud da lakaat ha gwirioù da dalvezout hag he goulnidnoù da vout sevenet e diabarzh ar Stad.
Brezel Pleg-Mor Persia, darvoudoù Bro-Dreger, ha darvoudoù all a ziskouez pegen alies e vez bech etre pobladou tud. Pesurt darempredoù a c'helle en Europeaniz kregij ganto asambles gant pobladou ar-bed-holl ?
Pa 'z eo bet kaoz eus "sevenadur bedel ha sevenadurioù poblou" eo bet klasket gouzout e pesurt mod e klok pe ne glok ket levezon ar sevenadur muiañ-strewet dre ar

bed hag hor youl da zerc'hel da bersonelezh hor bobl.
Evit pep a zanvez preder eo deuet arbenigourien da gemer perzh, evel an Ao. Yvo Poethers, hag an dud-se o deus klasket labourat asambles gant perzhidi an emvod-bloaz 'benn kavout respontoù.
War ar memes tro hag al labourioù-se eo bet kinniget prezegennoù diwar-benn dibarelezhioù Breizh e-keñver an ekonomiezh, an istor, ar sevenadur hag ar yezh.
Un diviz a zo bet evit an holl a faote dezhe d'an 23 a viz Ebrl da 9 eur hantor da noz, diwar-benn ekonomiezh Breizh hag he dazont en Europa, ha 'giz-se ez eus bet tu da welout pesurt mod emañ kont e-barzh Breizh un toullad mizvezhoù a-raok ma vo digoret marchad bras Europa.
D'ar 25 a viz Ebrl eo aet an dud da zizoliñ kreiz Breizh ha dreist-holl Park an Arvorig, ha da weladenniñ abati Landevenneg. Da noz ez eus bet fest-noz vras digor d'an holl e Knazenn Amzer Nevez e Soye.
E-pad ur sizhunvezh eo bet Europeaniz yaouank o prederiañ, o'ch ebatñ hag o kantreal, war ar memes tro o deus gallet kaozael asambles, larout pesurt spi 'zo ganto petramant gant petra "mant ch'halet evit ma leuy menoz Europa da vout un tamm mat soltloc'h e Breizh korf miz Ebrl 1991.

An dalcherien-klaoustreou prevez hag ar PMU

Ar Saozon a-enep d'an Trikon

Taget eo ar PMU, merour an trikon, gant gronnad-embregerezh Ladbroke Group a ver klaoustreou e pep lec'h e Breizh-Veur. Diarbenn a ra ar PMU ouzh emglevioù kenwerzh diazezet gant Kumuniezh Europa rak miret eo ar werzh eviti he-unan gant ar Stad ha degemer a ra skodoù-argant diganti.
Merañ a ra ar pikol gronnad-embregerezhioù Ladbroke Group stalioù-klaoustreañ tost e pep lec'h e Breizh-Veur. Kant milion lur saoz a c'hounez bep bloaz gant se hag unan eus ar chant kevredigezh kantañ war ar bed eo hervez ar "Financial Times". Evito ez eo ivez ar c'hlaoustreañ un ober prevez, evel evit Belgiz, Iwerzhoniz ha Nederlandiz, a vo ivez marse preizhoù Gronnad Ladbroke. E Stad-C'Hall avat ez eus ul lezenn abaoe 1891 a laka pep klaoustre dindan ar PMU. "Ur c'hevrezerezh displeal eo" eme unan eus prezegourien Ladbroke, John Harounoff. A-enep Diviz-Emglev Roma e ya ar PMU ha klemm he deus doujet Ladbroke dirak Kannadur Europa.
"Gwareziñ a ra gweli ar rumm gall gounid an holl hag ar vuhez-gazh" a eil-ger

Jean Farge, Prezidant ar PMU. Hervezañ n'eo ket miret ar werzh evit ar PMU rak galkout a rafe Ladbroke en em staliañ e Stad-C'Hall gant ma vefe doujet d'al lezennoù gall ganti : evit pep skod a gant lur e ve roet 60 lur d'ar PMU, 18,70 d'an Teñzor Gall (a c'hounez 6,5 miliard lur diwar ar PMU bep bloaz) ha 10,65 lur a chomle da Ladbroke. N'eo ket piljet homañ gant ar c'hinnig-se ha gortoz a ra respont Kannadur Europa evit gouzout gant piv a yelo ar march !
Yann-Varc'h Thorel

Istor ur stourm Dek vloaz zo

Dek vloaz zo, e miz Mae 1981, e varvas Bobby Sands e kamp-bac'h An Ceis Fhada (Long Kesh) en Hanternoz Iwerzhon. Mervel a reas diwar un harz-debrñ 65 devezh, renet da c'houlenn digant ar gouarnamant saoz reiñ en-dro da brizonidi an IRA ar statud politikel a oa ganto gwechall. Nav frizoniad all a varvas eveltañ war e lerc'h. Daoust da se e talc'has gouarnamant an Itron Thatcher da nac'h reiñ ur statud politikel d'an emsaverien toulbac'het. E koun Bobby Sands, marvet d'an oad a 27 vloaz, hag e gannaraded, e voe lakaet ur gurunenn bleunioù dirak monument ar re varv e Brest gant dileuridi "Komunourien Nevesaerien" ar C'Huzul-kêr. Komite Skozell Iwerzhon Brest hag ar Re C'Hias a oa deuet an devezh-se ivez da ziskouez n'o doa ket disoñjet marv an dud yaouank-se. Da lakaat ac'honomp ivez da soñjal er pezh a c'hoarvez hiziv an deiz en Hanternoz Iwerzhon. "Komz a reer kalz eus ar Gurded er mare-mañ", eme Louis Aminot, eilmaer Brest, "Hogen arabat disoñjal an traoù a c'hoarvez tostoc'h ouzimp en Europa". D'an hevelep devezh, d'ar Sul 5 a viz Mae 1991 ivez, a voe kounaet marv Bobby Sands e Plougastell. Roet eo bet e anv d'ul lorc'h eus ar gêr-se. Un nebeut devezhioù war-lerc'h al lid badezh e voe diskaret, e-pad an noz, ar blakenn "Jardin Bobby Sands" a oa bet lakaet gant an Ti-Kêr...

I.K.

Amnesty etrebroadel ha Bro-Varok

Derc'hel gant ar stourm

Daou strollad Amnesty Brest a zo e kennozh ar stourm dre lizher ouzh pennadurezhioù marokat, betek ma vefe digarc'hariet an eizh prizoniad politikel a reont war o zro. Tu 'zo deoc'h o skoazell: lizheroù-skouer a zo kinniget deoc'h e ti Amnesty, 1, str p'roudhon e Brest, d'ar Sadorn vintin ha d'al Lun etre 5e noz ha 6e30 noz. Un abadenn-gelaouiñ a vo dalc'h et d'ar Gwener 7 a viz Even da 6e30 noz e Ti an Holl an Harteloire, lec'h m'ho po tro da welet ur film ha da gomz gant un test marokat bet prizoniad politikel.

Pouez Israel war ar Stadoù Unanet Kudenn Palestina war skañvaat

Seizh mizvezh zo bet a-walc'h evit skarzhañ armeoù Irak er-maez eus Koweit. Pevar bloaz warn-ugent goude o aloubidigezh e chom Sisjordania, Gaza, Reter-Jerusalem hag ar Golan dindan an estren. Kenderc'hel a ra Israel da wallgas divizoù Jeneva a-zivout gwarezidigezh ar poblañsoù ha Washington a bae.



James Baker ha David Levy, ministr darempredoù Israel gant an estrenvroioù, o ren an diviz war Kuzuladeg Rannved Reter-kreiz

N'eo ket bet alies ken pouezus soñjoù Israel er Stadoù-Unanet hag emaint bremañ : kazetennerien a-bouez a ra abostolarezh soñjoù al Likoud, sevenaet e vez a-brast ouzh rekedoù Israel gant ar C'Hendalc'h. Tri fenn gazetenn a zifenn sabventoù Jeruzalem ingal a-walc'h en "New York Times", "Time", "U.S. News and World Report", "Newsweek" hag ar "Washington Post" o deus ivez o departamant-Stad". Diaes e vefe kavout kement a skoazell er c'hazetennoù evit ar Balestinianed. Dre c'hoari al lobby israelgarour AIPAC eo bet a-viskoazh ar C'Hendalc'h hag ar Sened daou eus peulioù an darempredoù etre Washington ha Jeruzalem. Hogen ez eo ledanaet koskoriad mignonned Israel er C'Hendalc'h abaoe ar brezel.

Kredadoù

N'eo ket bet da c'hortoz pell evit gouzout pezh a dalvez a-fed argant : goulennet ez eus bet gant Israel 13 miliard dollar digant ar S.U. evit bout reaset taelioù hep o reiñ en-dro. Kalz

eo memestra evit reiñ bod ha boued da enbroidi eus ar Sovietoù en Israel, d'ar poent m'ez eus tri milion a dud diannez er S.U.. 400 milion dollar a oa bet roet e miz C'Hwevrer. "Nebeut-tre" eo evit Ministr an enbroidi en Israel. 650 milion dollar a voe roet e miz Meurzh da zigoustañ frejoù Israel evit ar brazoù ; prenañ maskloù a-enep d'ar brazoù, derc'hel an armeoù war evezh. Evel-just ez eus bet roet kement-se ouzhpenn an 3 miliard a gredadoù a ro ar S.U. da Israel hep bloez hep gortoz tamm daskoradur ebet. 38% eus skoazell ar S.U. d'an estrenvroioù eo kement-se. Gwellidigezh an darempredoù etre Israel ha Koweit a greñva stad Izaag Shamir er S.U.. Kent miz Eost diwezhañ e laboure kalz Koweit evit stad ar Balestinianed. Bremañ "omp adu gant ar S.U. evit an diemglevioù etre Israel ha Palestina" eme Saoud Al Sabah, kannad koweit er S.U. d'an 30 a viz Meurzh. "En em soñjal a reomp en-dro a-zivout boikot armerzh Israel. Kollet he deus kudenn Palestina ar pouez a roemp dezhi kent".

Yann-Varc'h Thorel

Istor enezenn Hawai Trevadenn ar S.U.

Staget 'oa bet Hawai ouzh ar Stadoù-Unanet d'ar 15 a viz Even 1898. Seizh miz war-lerc'h e c'hoarvezas an hevelep tra d'ar Filipinez. Abegoù damheñvel en devoa gouarnamant ar S.U. bep tro : rak aon an aloubidigezh eus perzh Bro-Japan (ar pezh a enved "an arvar melenn") hag evit asur o hentoù kenwerzh a-enep da Vro-Sina. Ouzhpenn-se e oa damheñvel e zoareoù da waskañ henvroiz an div vro-hont.

Kredif a raent hag e oa an impalaerouriezh spagnolat ur riskl bras evit ar Filipinez hag a lare 'oa ret saveteiñ Hawai ouzh dañjer he rouanez Lili'uokalani. Er Filipinez e troas an emsavadeg da wir vrezel gwadel abalamour da oberennoù ar jeneraled a labourere evit an Amerikaned hag a oa mistri bras gwaskerezh ha jahinererezh an indianed anezhe. Buan e varvas an emsavadeg e Hawai padal dindan pouez ar C'Homite Surentez, evel m'hal lare. A-barzh un nebeut bloavezhioù achalenn e tiskennas tizh-ha-tizh ar boblañs hawaiat, e-keit ma kraske hini ar re wenna.

Mont a reas ar c'hleñvedoù reizhel, al loutdi hag ar vezventi da vazañ ur tu, vir vosenn evit an Hawaiiz, diouzh un tu, ha diouzh un tu all e kemeras ar gristeñlezh hag ar gonwerzh plas ar sevenadur hengounel. Meur a benn-bras ag Hawai a zeuas da wezañ binviñ ar re wenna. Spontus e oa feur an emlahzadegoù. Er bloavezh 1935 e tizhas ar Filipinez he frankiz. Menel a ra Hawai ur dravadenn eus ar S.U. avat. Ha koulskoude e oa Hawai ur rouantelezh emren anavezet gant meur a stad Europa c'hoazh betek an XIXvet kantved. Neoazh e plegas ar rouaned dindan pouez an abaferezh hag an iriennoù avat, ha neuze e rankas ar bobl stourm ken kalet ma c'hellas evit mirout ouzh he doare bevañ mont da get.

Er bloavezh 1837 endeo en devoa David Malo, keodadour Hawai, kredet laret d'ar c'hentañ ministr hag e oa deut an enezenn da vazañ ur c'hast-di bras evit an estrañjourien.

Kenderc'hel a raer ar bobl da bouezañ war ar rouaned evit ma paouezfent da reiñ douarioù an enezenn d'an diavaezidi, ar pezh a oa boutin a-walc'h d'an ampoent-se hag a lakae ar sevenadur hengounel da vont war wanaat. Hogen hervez ar rouaned e oa an estrañjourien a-bouez bras evit ar vro hag evit gallout mont aezetoc'h e d'arempred gant ar broioù-all, ur seurt kuzulierien etrevroadel avat.

E 1948 e krogas ar Mahele Meur, da laret eo e rannjod douar Hawai etre ar rouan ha renerien ar c'houarnamant, 45 war-lerc'h e kollas ar rouanez Siliokalani he zron hag e voe lakaet ur c'houarnamant etrekarg' n he flas betek goût -ur bloavezh war-lerc'h e voe diskariet ar Republik da vat.

Nevez zo ez eo aet askre-broadelour an Hawaiiz war gresk : e 1982 e oa deut ar bobl a-benn da lakaat gouarnamant Reagan da savet ur c'huzul-enklask karget da studial testannabezioù a "dorfedoù hag amreizhadurioù" en he c'hevner, hag evit goût az-reiz hag-ef e voe bet staget Hawai ouzh ar S.U. en un doare er-maez eus al lezenn etrevroadel er c'hantved kent. Er c'huzul-enklask-se en em vode 3 hawaiiad ha 6 den gwenet gant Reagan e-unan. Daoust da gredennoù stant kannaded Hawai, e tisklarias ar c'huzul-enklask na oa bet amreizhadur emzalc'h ebet e-keñver poblañs an enezenn.

Diwar ar C'Hastilhaneg in Minorias Étnicas (Integral, strobad 21) Robert Baxter

• Korsika

Evit an eil gwech ez eo aet ar sened a-enep d'ar raktres lezennel e-keñver statud Korsika. Votet en deus ar sened e vefe divizet da gentañ ur gouleñn kent, ar pezh a ziskouez sklaer n'o deus youl vat ebet mont war-raok gant ar breud.

• Kanaki

Divizet en deus al LKS (Strollad Frankiz Kanaki Sokilaour) d'anzav an emglev sinet gant Stad-C'Hali tri vloaz zo endeo. Disklariañ a reas prezidant al LKS : "Daoust din bezañ sinet an emglev-mañ, ne gredan ket e c'hell talvezout ken".

• Hegoalde (Euskadi ar C'Heistreiz) D'ar Sadorn 27 a viz Ebrl ez eo bet tennet war soudarded gwernizion Loloia e-keit ma oant o saludiñ banniel Stad-Spagn. Gloazet e oa bet daou nannsoudard ha gouarnour-soudard rannvro c'hGipuzkoa, Jose Luis Garcia da trias.

Hervez an archerien en em gaver an tennañ a 300 metrad ouzh an dibudadeg. Ar pevare gwech e vefe da ETA bizañ gouarnamant soudardel Gipuzkoa — gant ma 'z eo ETA an hini kiriek d'an oberiadenn-mañ evel-just.



• Iwerzhon an Hanternoz

Evit ar wech kentañ abaoe 1974 ez adstigas ar gatioliked-vrogarourien hag ar droestanted-unvanourien gant o c'henvreuterezh dindan bañ Pater Brooke, ministr Breizh-veur karget eus alarioù Iwerzhon an Hanternoz. Kregiñ a reas ar c'henvreuterezh d'ar Meurzh 30 a viz Ebrl e Stormant, nepell ouzh Beal Feirste, ar parlant unvanour kozh, diodet e 1972. Kavout un doare mat da ingalañ gwelloc'h ar galloud politikel eo pal ar c'henvreuterezh-mañ. Hogen ret eo degas da soñjal na gemero perzh er vreuradenn na Sinn Féin nag Arme Republikan Iwerzhon (an IRA).

Ronan Barvek

Advertisement for Lennit al liamm, featuring the text 'Skrivañ de AL LIAMM 16 straed des Fours à Chaux 35400 - SAINT MALO' and 'Koumanant bloez 120 lur (studierien, tud dilabour 100 lur)'.

LATVIA

MUNTR UR VROAD 1940-1980

Dispaket e oa bet stand SKOAZELL BREIZH POBLOU BALT e Gouel broadel ar Brezhoneg e Karaez, d'ar Sul 19 a viz Mae. Ul latviad yaouank, repuget e Paris, a oa deuet da welet ac'hanomp hag evel-se hon doa bet tro da gaozeal diwar-benn e vro, hag ar pezh a c'hellje ar Vretoned ober evit skoazellañ ar poblou balt. Kement ha boulc'hañ an dorzh gant Latvia, e kinnigomp d'al lennerien un troc'had istor bet troet diwar ar gazetenn "Nouvelles Baïtes".

TRUBARDEREZH

Setu amañ planedenn reizvaudik ur bobl hag a c'heller larec ac'he eo bet ankouet gant an dud hag an istor.

Miz Eost 1939 : lakaet e voe Latvia dindan gazel-ge, da heul ar four-emplev etre an Alamagn hag URSS. Ar mennozh da beurlazhañ he tobi, avat, a oa savet e penn Stalin un nebeud bloavezhioù a-raok, p'en doa kaset da get meur a zek mil bolchevik latviad o chom en URSS. Miz Here 1939 : sinañ a reas LATVIA un emglev gant galloud MOSKOV, o reiñ dezhañ meur a dachenn soudard, da larec eo, an tu da aloubañ ar vro. O seizh gwellañ a reas Soviediz evit dinec'hiñ ar Vatted war gement-se : ne oa ket oc'h emrenezhez war vezañ en arvar.

Ha didrouzilh e voe ar vro betek miz Mae 1940 ; da hanter-Vezheven avat, en em strinkas An Arme Ruz war an teir Stad. Bep a ouarnamant a-du gant ar Gomonourien a voe lakaet dezhe, dre nerzh, gant Vichinsky, a lakaas ober "votadegoù" e doare Moskov. Kuit a doujañ ouzh lezenn-diaez ar stad, ec'h embanne ar SAEIMA (bodadeg vaur) nevez penaos e troe Republik Latvia en ur republik soviedel. Kregiñ a reas ar vistri nevez da bakañ tud, adalek an 11 ha 12 a viz Gouhelen 1940. Toullbac'het e voe prezidant ar Republik dizalc'h, Kārlis Ulmanis, hag e vinistred bet, d'an 21. Kaset e voe ar prezidant d'ar C'haokaz da gentañ, ha da Grasnovodsk en Turkmenistan, pa dostaas an Alamanned, Marvet e vije eno e miz Gwengolo 1942. Savet ez eus bet ur gomision da adkravout anezhañ met tro wenn he deus graet betek-hen. Adalek miz Here 1939 e oa bet gweliet gant an NKVD kas da get milieroù a Latviad barnet evel tud a-enep ar Soviedoù (ordrennañs 001223 bet sinet gant SEROV, eil-komisier eus Surentez ar Stad da neuze). Lakaet ez eus bet e voe harluet, etre miz Gouhelen 1940 ha miz Mezheven 1941, 35 000



Soudarded nazi e 1939 o tenniñ an harzoù

Latviad hag a voe paket 14 693 anezhe d'an 13 a viz Mezheven 1941, en o zouez 3 000 a vugale. E doareoù skrijus-meurbet e voent kaset da Siberia an Hanternoz e-lec'h ma varvas gant an naon hag ar riv ar re manet bev war-lec'h ar veaj. A-hend-all, drouklazhet e voe meur a vil den e prizon Riga ; kavet e voe eno ur bern korfoù marv goude d'ar Rusianed bezañ tec'het a-zirak an Alamanned. Spered ar vro a voe taget gant an dorfedourien ivez. Adalek 1940 e voe embannet ul listennad levrioù gant skrivagnerien lakaet da vroadelourien. Adwellet e voe c'hoazh e miz C'hwevrer ha miz Meurzh 1941. Lamet e voe evel-se meur a vil levr eus al levraouegoù hag ar stalioù-levrioù da vezañ devet. Meur a skrivagner a voe drouklazhet zoken ; Aleksandir GRINS, Atis KENINS, Vitālijs SKRINS, Viktors SKUJA, Ligotnu JEKABS a voe harluet da Siberia ha kalz anezha a yeas da get eno. Ar re aet gant soudarded ar Soviedoù war-dec'h ne voe ket bravoc'h dezhe : fuzuilhet e voe al livour Romans SUTA e 1944 e Tbilisi. Kement rummad a oa er boblañs, rummadoù-etre, micherourien, kouerien, pastored ha beleien, kargidi

uhel ha soudarded eus arme LATVIA dizalc'h, a voe harluet ha drouklazhet meur a hinenn anezhe. Mont a reas gantan "Dispach" daou oberer anezhañ zoken, daou ezel eus ar gouarnamant a-berzh pobl, hag a voe divroet : Peteris BLAUS ha Jūlijs LACIS a varvas e 1941.

REUZ AR BREZEL

Lakaet e voe an arme bet adbadezet "a-berzh pobl" e-barzh an Arme Ruz, o tont da vezañ ar 24vet rann fuzuilherien anezhi, graet gant div azrann (181 ha 183) hag ur rejimant kanolioerezh (613). Ma'z eas darn eus an ofisourien da goachañ dre furnez, ec'h eas reoù all, evezhiet a-dost gant ar b'politrouk"-ed (komisered an Arme Ruz) da servijañ e-barzh Arme Moskov, dre nerzh alies. Un niver a ofisourien a voe paurlazhet e LITENE, e Bro-Vidzeme, (e Latvia), gant ar stalnourien, e-pad an drouziwezh da heul argadenn an Alamanned. Touillet e voe e zaoulagad d'ar jeneral GOPPERS, a-raok bezañ lazhet.

Ne c'hounezas ket kalz ofisourien eus Arme Vroadel Latvia ur stad gwall-uhel en Arme Ruz. Lazhet e voe ar jeneral

R. KĻAVINS e 1944 : n'eus nemet ar jeneral O.UDENTINS marteze, aet da anaon e 1988, a dorras al lezenn-se. Aes eo kompren, goude kement-all a euzh, e oa bet uru-mat an Alamanned gant Latviz. Kement-se ne oa ket diwar daremprediñ an Nazied avat. Rak eeun e oa o fal : gwelet a raent divroañ an holl Latgaliz hag ouzhpenn an hanter eus al Latviz all. Tonket e vije bet ar re o chom da vezañ mevelien. Met dalc'het e oa spered an Alamanned gant ar c'hoant da c'houiniñ ar brezel dreist-holl, pezh a rekouras pobl Latvia moarvat. Koulskoude, kenkent hag eruete, e komañsed da glask digoli da bep tra. Drouklazhet e voe tri mil a dud lakaet da genlabourerien ar Re Ruz. E fin miz Du ha miz Kerzu 1941 e voe lazhadegoù Yuzevien eus ar re euzhusañ e koadoù RUMBULA. Padout a reas ar c'hriderioù-se betek miz Mae 1942 : sabellet e voe gwazed, maouezed ha bugale mesk-ha-mesk e-barzh foziou boutin. Ne vane, e Latvia, e 1943, nemet 2000 Israeiz, sitoianed Latvia ar braz anezhe, diwar war-dro 85 000 hag a veze er vro e 1940. Bodet e voent e RIGA, e-kichen Mezaparks, ha peurlazhet d'an 2 viz Here 1944. Un niver a vedisined hag a skiantourien, bet kemeret perzh gante e buhez ar spered er vro etre an daou vrezel, a oa e-touez ar re muntr. Savet o doa an Nazied ur c'hamp-bac'hañ e SALASPILS, stal vras an Ankou a oa ennañ ouzhpenn 50 000 a dud, en o zouez 7 000 a vugale. Pa grogas al labourerien d'ober diouer, e reas an Alamanned divroañ milieroù a blac'hed hag a baotred etrezek an trede Reich. An diouer a soudarded a oant kroget da vezañ nec'het gantañ ivez. Goude ma kave dezhe e oant eus ur ouenn uheloc'h e teuas da soñj d'an Nazied e oa emgannerien galonek eus Latviz. Eesañ a raent gwelet betek 15 000 a dud, baotred en oc'h armoù ha sevel div azrann Waffen SS, ar 15vet hag an 19vet latviad. Dre m'o doa ar Rusianed miret ur rann-arme Latviad ivez, ha hi rusekaet a-walc'h, e tapas an daou waskerezh gwashañ eus an XXvet kantved lakaat Latviz d'en em lazhañ an eil egile.

Klask a reas ar jeneral KURELIS sevel un arme vitan da stourm war un dro a-enep d'an Nazied ha d'ar Gomonourien met ne gasas ket e soñj da benn-vat hag e voe harluet, gant 450 soudard, da gamp-bac'hañ STUTTHOF e-kichen DANZIG (GDANSK) e-lec'h ma tapas menel

bav. Ul lodenn vitan eus e stourmerien, renet gant al letanant RUBEKENS, en em gannas a-enep d'an Alamanned, a pastell-vro VENTSPILS ; lazhet e voent-holl e koadoù ar stêr ABAVA. Ul lodenn vat eus ar vro a oa bet aloubet gant ar soudarded ruz e fin ar bloaz 1944. Dre ma larent kastizañ kriz pep "kenlabourer" e lakaas ar Gomonourien ur spont divuzet en o c'helfter da greiñ e Latviz. Traktoù a veze skignet dre garr-nij ; ankeniet-bras e oa an dud, spurmet gant al lazhadegoù bet a-raok ar brezel. Dam a gavas gweliñ tec'het asambles gant an Alamanned ; darn all mont da goachañ. Digablus e oa ar pep brasañ eus ar boblañs met aon o doa rak ar Rusianed muioc'h eget a-raok. Dindan gazel-ge Soviediz e oa ar vro adarre e penn-kentañ ar bloaz 1945, war-bouez pastell-vro Kourlandia (kornog Latvia) e lec'h ma talc'hed soudarded alaman ha latviad da enebñ. E-barzh ur vro dismantr e ch adkrogas al lazhadegoù. 5000 a dud a gollas o buhez e muntradegoù kriz ha divroadegoù, etre 1944 ha 1945. Tec'het o doa war-dro 150 000 a dud, alies a-douez ar pep gwellañ eus ar vroad. En harlu-se e kollas Latvia he gwellañ mibien. Peurdrac'het e voe soudarded Kourlandia d'an 9-10 a viz Mae 1945. Ne chome pelloc'h nemet 1 400 000 a dud er vro, Latviz 83 % anezhe.



Degemeret e voe ivez, kuit a c'houzout hiroc'h (er penn kentañ d'an nebeutañ) kement hini a ginnige e skoazell. Gant doareoù Stalin oc'h ober o reuz adarre, e klaskas stourmerien a-du gant ar vro, anvet Breudeur ar C'hoaed, enebñ ouzh Moskow. Sikouret e vezent gant ar gouerien a oa krog da c'houzafuz abalamour d'ar c'hollekivelaat. N'eo ket gwall anavez istor stourm Latvia. Dister ha dizesper e c'hell

seblantout. En oc'h aez, avat, en em gave ar baotred-se e-mesk ar bobl, hag i en o-unan, o c'houzafuz gant ar riv hag alies gant an naon, hep gouzout doare dezhe, e raent gant doareoù-stourm ar brezel-diaerzh bet brudet gant ar Gomonourien d'o zro, er Viet-Nam. Ur c'hamm a oa koulskoude, ha n'eo ket unan bihan ec'h eo : ne veze ket padred Latvia skoazellet ha dreist-holl ne veze ket brudet pal o stourmad dre ar bad-holl. Hervez broadelourien Latvia, n'helle ar c'hoari-nerzh etre ar broioù krefañ, maget gant ar brezel yen, nemet kas d'un trede brezel-bed. Hag oc'h esperañs a oa eno rak kredinñ a rae dezhe e vije trec'h ar Bad Dizalc'h war ar Gomonourien. Da c'hortoz o bro da vezañ digabstrail e oa ret dezhe en em gannañ a-enep d'an alouberien. Ne oa ket unanet renezh ar stourm. lodennet e meur a strollad ne laran ket. Dishañval e oa eta diouzh pezh a c'hoarvezas e Lituania. Emgannoù ha krogadoù a oa bet er bloavezhioù-se eta. Dre ma ne oa ket diazher an hent eus Riga da Ventspils e rae ar Rusianed tro d'o hent dre Liepāja. Ne oa ket ral gwelet banniel ar vro o stlakai e-pad meur a zavezh war toulliz ar bourk-mañ-bourk nevez-dizalc'het gant ar stourmerien guzh. Stagañ a reas galloud Stalin, adalek 1946, da savel talloù bras diwar ar gouerien manet dizalc'h a-benn rediañ anezhe d'an em vodañ e menajoù kollektivel ("kolkozh"). Seul grahoc'h a se e teuas ar stourm da vezañ. Da gelfter ur gwir emgann-brezel e voe hogozik dizalc'het kêr REZEKNE e-pad ur prantad berr. Kanolioù bras eo a implijas Soviediz e pastell-vro Madona evit dont a-benn eus ur pezh strollad stourmerien guzh. Strolladoù oberiant a ra ivez dre koadere eus rbl

kleiz ar stêr Daugava. Evit galloud Moskov n'helle ken an traoù padout awei-se. Ne zeue ken keloù ebet er C'huzh-Heol eus ar stadoù balt. Aozlec'h a se e voe d'ar C'hremlin kas e c'hoar dezhañ e-unan. Soñjal a reas divroañ ar boblañs en he fezh evel m'en doa graet a-raok gant broadoù all. Da c'hortoz bazañ sevenet ar gefridi spontus-se e voe troc'het ar stourmerien guzh diouzh o skoazellerien natur, da laret eo, ar gouerien, evel-hen : bac'het e voe 45 000 a gouerien, gwazed, gwragez, bugale hag all, d'ar 25 a viz Meurzh 1949 ha kaset da Siberia. Mervel a reas an drederenn anezhe. Goude bezañ bet kollet he fenn, e kolle Latvia un darn eus he c'horf eta, ene he douar. Rustaned, Bielorusianed, Ukrainiz eo a voe degaset da gemer

ar varzhed Elza STERSTE krouet ur strollad bihan gant un nebeud arzourien all, anvet Strollad Gall : harluet e voent holl. Hañval a voe graet da reoù all evel Janis MEDENIS, Harijs HEISTERS, Andrejs KURCIJS, Valdis GREVINS, Vilis CEDRINS a varvas e 1946. Ne voe graet droug ebet avat d'ar re a gane meuleudi da Stalin evel VEJANS pe GRIGULIS.

BLOAVEZHIOU 60 HA 70
Gant marv an tirant hag a wellañ war e lerc'h e retomas d'ar gêr an divroidi gentañ, goude an amnistezh, e miz Meurzh 1954. O vezañ ma vane galloud Moskov etre daou soñj e-kreiz ar bloavezhioù '50, ec'h eas muloc'h a Latvia eus ar vro e-barzh ar strollad komunour evit esaañ striañ o

avat. N'eo ket un hanter re vuan ec'h ae an adsevel abalamour d'an dizurzh natur d'ar velestradurezh soviedel. Tapet o doa komunourien Latvia karzhañ eus ar strollad hec'h izili rusakaet. Eneññ a reas ar eil-ministr kentañ Eduards BERKLAVS e-unan e penn ar stourm a-enep d'ar rusekaat. Cheñchet e voe ar programmoù-skol hag e-pad ul lajad e c'hallas buhez ar spered diorren dirubuilh. Fulonñ naet a reas KHROUCHTCHQV gant an emsav-se, hag efñ ur a-walc'h, (pijoù en dije graet a-walc'h da C'horbatc'hoz hiziv an deiz) abalamour ma wele an div republik balt all kemer kentel diouzh emsav Latvia. Un Ouzbek, MOUKHITDINOV, a voe kaset da Riga gant an Aotrou K. ; kenkent e voe karzhet eus ar strollad an izili "broadelour ha bourc'hiz". "Purel" e voe ar vro penn-da-benn ha bac'het Berklavs e Vladimir. Tennet e oa bet o c'harg digant sekretour kentañ ar yaouankizoù komunour RUSKULIS, digant rener ar sidikadoù PINKIS ; eil-sekretour ar strollad KRUMINS a voe lakaet ur Rusian en e blas. Milleroù a viliantent a c'hoarvezas gante evel gant ar pennoù bras. Bezañ Latviaid eus ar vro e oa pec'hed pennañ pep hini eus an dud-se. Latvia rusakeat eo a voe lakaet en o flas, n'eo ket evit mad ar vro e voe, avat, Gwasthoc'h-gwashañ e teuas ar rusakaat da vezañ. Pa'z erruas BREJNEV, KOSYGIN ha PODGORNY, kuit a cheñch penn d'ar vazh, ec'h eas ar gwastkerzh war greñvaat c'hoazh. Ur renabl eus kampoù-bac'hañ Goulag Latvia a voe embannet gant ar gazetenn "La pensée Russe" eus Pariz, o tiskoez 11 kemp : darn anezhe gant reoliadur strizh, 2 gamp evit ar merc'hed hag unan evit tud dindan 18 vloaz. Dre ma rae galloud Brejnev e ruz e vro ec'h ae ar vezventi hag an dienez war gresk. A zo gwasthoc'h, e 1976 e voe renabl 60 000 koll-bugale-e-skaoz 34 000 bugel bet ganet. Diwall a rae evat renerien ar vro d'ar c'hoaz-se da zisplijout da Voskov ha da sevel o mouezh, en ur zerc'hel o bell en he startañ avat. Diwar ar politikerezh diboaell-se eo bet kaset ar vro d'ur stad ken truezus ken ne chom en o flom nemet nerzh-spered an lizoù luterian ha katolik.

Joel Donnart

E-barzh un niverenn gentañ eus Bremañ, e vo kontet doare ar stourm abaoe e-pad ar bloavezhioù diwezhañ, evel ma oa bet graet evit Litwania.



soudarded an Arme Soviedel e Bro-Latvia

plas ar re bet harluet. E-kreiz ar bloaz 1951 e voe echuet ar c'hollaktiveleat. Dre ziouer a skoazell ec'h eas an niver a stourmerien guzh war goazhañ, darn oc'h en em reiñ da geñver an amnistezh laret ha na voe ket roet dezhe, evel-just. Cheñch anv a reas reoù all ha mont da douez ar bobl. Hanter-kant stourmer broadelour, avat, a voe lazhet e-barzh ur c'hrogad tenn etre ar soudarded komunour ha soudarded ar vro en OKTE (bro Talsi) e miz C'hwevrer 1950. Ken kriz all e voe galloud Stalin e-keñver an intellektuelled. E soñj eus al liammoù bet skoulmet gantañ a-raok ar brezel o doa al livour Kurts FRIDRIHSONS hag

mammvro dreze oc'h-unan. Ret eo laret ivez o doa Soviediz, d'ar c'hoaz-se, dibabet ober gant ar rusekaat kaset en e washañ a-benn peurlazhañ ar vroad. Soñjal a raed, dre raktresoù diskiant, treiñ Latvia, anezhi bro al labour-douar, en ur c'horn-bro stank an industriezhioù ennañ. Embannet e veze dre URSS a-bezh, war ar c'hazetennoù-lec'h, e vije roet ur pae hag ul lojeiz a-feson en ur vro pljusoc'h eget meur a gornad all eus Rusia. Pedet e oa Latvia eta da reiñ plas d'an alouberien nevez ha da lodennan o rannidion gante. A bep-tu e tere-de labourerien dedennet gant ar promesaoù kaer-se. War washaat ec'h ae an traoù e Riga hag er vro a-bezh,

Freuzadur yaouankiz dre youl



"Douget emañ ar rumm-oad-se dre natur d'ur marv kriz. Taol-kaer ebet gant "Morzhol an Ankou" e-touez ar re yaouank, anat eo. Gwallzarvoudoù-hent, emlazhoù, pe an daou war-un-dro (renerzh diroll e pep keñver) : war tonnusaat e ya anezhi, ur spont ! War ur rentañ-kont eus an 21 a viz Here 1988, e tispleg Kuzul Uhel ar Familhag hag ar Boblañs e from. Skrijus an disoc'hioù : etre 1960 ha 1985 eo bet teirgementent emlazh ar grennarded, 900 den yaouank en em lazhe bep bloaz, pacted dreist-holl. En tu-mañ d'ar wirionez emañ ar sifroù, anat eo (kuzh e c'hell chom an drama). Kalz muloc'h e klask ar merc'hed hen ober (30 000 anezho, ouzh 10 000 eus ar re all) hep dont a-benn. Gant louzezh seoderañs ha peoc'hañs e klaskont ober ; ar bared a ra gant doareoù a zivell e c'hoazoug d'ar Regervezh-Meur (armoù-tan pe dibrestradur). Gant Bro-C'Hall e ya maout auzhus ar brasañ niver a dud 'o klask en em lazhañ' (c'hwitiae ganto o zaol) etre 15 ha 24 bloaz, ar Suis hag Austria war-lerc'h. Pouezhañ a ra an enkadenn-vevañ, ar fallvezañ, an diouer-fiziañs a ya gant tremen d'an oad-gour ha gwanat an harz da reiñ d'an enkrezhoù (notennoù fall, torr-dimeziñ o zud, torr-karedigezh, pe koll un den karet). Ne tispleg ket an traoù-se pep tra. Na kennnebet an en-dro kevezañ, kiladennoù armerzhel ar broioù ijinedreket ne rae an dilabour nemet reiñ kresk d'an emlazhoù, reiñ buhez dezho, ne ra ket!"

Da houilh kement-se, an aridennad gerioù toull ha troioù diaes da intent, liv ar bizkologiezh uhel wano, o vennout diskouez n'eus netra d'ober. Ma komprennan mat tro-spered ar gelaouennerezh, e vefe hounnezh o klask un elfenn fatis, ur vikrobenn bennak a vefe kablus d'ar gwaleür-se,

"Bez' en em lazhe, hiziv an deiz, ar re a zo etre 15 ha 24 bloaz teir gwec'h muloc'h eget e 1960. Displegañ pep tra ne ra ket an enkadenn (-greskiñ)".

ma tefe erlin da vezañ skiantel. Gallouachoù, tra ken ! Daoust hag-ef eus unan bennak a oar petra a ro buhez d'ar vuhaz ? Pelloc'hik e c'heller lenn kement-mañ : "Bez' e klask en em lazhañ ar merc'hed o tout eus ar Maghreb da skouer, peder gwec'h muloc'h eget ar re all!". Nag a bilpouerezh en "da skouer"-se, tvat ket d'oc'h ? A-hend-all, o vezañ m'emañ douget ar rumm-oad-se "dre natur" d'ur marv kriz, perak neuze, ma 'z eo gwir, mont da glask pemp pav d'al leue, ha ma n'eo ket, perak bezañ dogmatek ? Pe, aon he dije Laurence Folléa da anzavout un dra bennak evel-hen, da skouer : n'eo ket evurus an dud a zo o vevañ dindan renerzh Bro-C'Hall. Kouz dezhi lavarout ez eo ur c'hwitadenn ar vro-se. (1) - Laurence Folléa, Le Monde, stagadenn radio-TV 4-10/3/91 G.S. Un dra vunut all evit treiñ ar gaoz un tammig : "Kemennet eo bet gant ar Frañs digwener (3-05-91) e kaste (d'ar Bangladesh) ur skoazell 300 000 lur diwar zifrae, da gregiñ ganti. (...) e Jeneva ha deus graet ur gemennadenn ar Groat Ruz evit kaout 48 milion lur. Pourvezet eo bet dija ur skoazell 12,2 milion lur gant ar Stadoù-Unanet, hag emañ Breizh Veur o vont da ouzhpennañ 20 milion lur d'ha skoazell gentañ 25 milion lur. (OF 4-5/05-91)"

Jill Boucherit



Stajoù

Stumdi

E enez Eussa, eus an 3 d'ar 7 a viz Even
E Treglonou eus ar 17 d'an 21 a viz Even
Crash course en Orian eus an 29 a viz Gouere d'an 2 a viz Eost
Pempzek devezh evit an dracouidi hepken eus an 8 d'an 19 a viz Gouere

Evit reisivadurioù all :

Stumdi, B.P. 41, 29870 Lanniliz, p. 98 04 08 31

KEAV

Kamp etrebeket ar vrezhonegerien Skol-hañv 1991

Pelec'h ?

Dalc'het e vo skol-hañv 1991 KEAV (ezel eus Kuzul ar Brezhoneg) er skol-stad Joliet-Curie e Skaer.

Pegoulz ?

Daou brantad-studi a vo kinniget adarre ar bloaz-mañ :

Ar prantad kentañ eus ar sul 14 a viz Gouere, da 90 (evit deññi koan : dagementet e vo an dud adalek 4e goude merenn) betek ar Sadom 20 goude merenn.

An eil prantad eus ar sul 21 a viz Gouere da 4e goude merenn betek ar Sadom 27 goude merenn.

Bez e c'heller dibab dont d'ar prantad-studi kentañ, d'an eil, pe d'an daou.

Petra vo graet er c'hamp ?

- Kentelioù eus 9 eur da greisteiz hag eus 2 eur da 5 eur, ar rummadoù bihan.

- Da greisteiz : kan, hervez kinnigoù ar gelennerezh.

- Goude 5 eur (hervez an deizioù) : sportoù, kaozeadennoù, poumenadennoù ... pe kentelioù.

Pegement ?

1000 lur e kousto pep sizhunvezh. Ret eo pareañ an hanter (500 lur pe 1000 lur, eta) a-raok dont ha kas ar chekenn da gKEAV.

Petra da zegas ?

- Ur sach-kousket (pe penlennoù ha linselloù) ;

- Paedra da skrivañ, ho yezhadur ha geradur ;

- Bivioù-seniñ, filmoù da ziskouez hervez an dud, kanaouennoù, ha ...

Pennaos dont ?

Emañ Skaer e-kreiz un tric'horn Kemper-Gourin-Kemper. Gwalloch eo d'ar re a zsu gant an treñ diskenn e Rosperden. Ur c'harbounñ a zo eus Rosperden da Skaer.

Keav 22 hent Mouliouan 29000 Kemper

Divezhegezh er Gouezelva

10 000 den o komz iwerzhoneg bemdez

Bloaz 'zo pe zaou e voe goulnennet ouzh ar skrivagner Breandan o hEithir gant Burev-Stad an Iwerzhoneg displegañ dre skrid petra d'e vano a dlefed ober evit saveteiñ ar yezh. Hennezh a oa un den dizalc'h eus ar c'hrevredigezhioù evel Conradh na Gaelige, a gred lod ez int re utuek, pe re viroürel, pe ez eont re bell gant o abegerezh.

Un tammlig a-raok ma varvas - gwall abred siwazh- ec'h echuas e enklask. Ne voe ket embannet. Evit ar Burev e oa hepken. Padal, deut eur a-benn da c'houzout petra zo en danevellekrid. N'eus mui hevezhañ nemet 10 000 den bennak er Gouezelva oc'h ober gant an iwerzhoneg da yezh pemdeziek. Sabatuet ez eus bet kalz tud gant ar sif-se. Moarvat ez eus etre 50 000 ha 80 000 den o chom er Gouezelva ofisiel, ha gouzout a ra an holl ez eus toledoù ennañ hag a zo aet da Vreizh-Ouezelva abaoe pell'zo. Gouzout a reer ez eo krignet-don ar Gouezelva gant ar saozneg, met 10 000 den, se a vele mantras !



N'eo ket da lavarout na reont ket ivez gant ar saozneg. A-dra-sur e reont, ha kalz zoken. E bourc'h An Spidéal, da Seur-Seur1/2, pa vez etru ar skol, ne glevat merc'hed ar skol eil dezrez o komz tra' nemet saozneg. Hag an nebeut a vugale an ardrevez ma zi, muioc'h war ar maez, a ra heñvel. Marteze ez eo kreñvoc'h ar yezh pelloc'h er C'Hornog; gouzout a ra ar vugale iwerzhoneg, respont a reont aes er yezh-se pa 'z eer dezho drezi, met e gwirionez ez int divezhek, ha gant ar saozneg emañ al lañs.

Setu perak eo ken mallus sevel ur servij-skinwel iwerzhonek, gant programmoù evit ar re yaouank, evit ar vugale. Rak bremañ n'o devez nemet raou e saozneg ha ne sellont nemet ouzh ar seurt-se, rak ar pezh a vez en iwerzhonek zo koulz lavarad holl evit tud deud. Manozioù disheñvel zo a-zivout an doare ma tle bezañ aozet ar servij-se, e-peloc'h e tle bezañ kreizennet, met moarvat e vo divizet an dra-se diouzh ar c'hementad arc'hant a c'hall ar Stad gouestlañ dezhañ. Prometet eo bet gant Haughey e vo savet a-benn ar bloaz a zeu. 'mechañs ne vo ket kavet digarezioù evit goursezañ.

A. Heusaff

Mezh ebet

Anna Vreizh dimezet ha dizimezet ... e Foujera

Meneget hon boa e niverenn Bremañ miz Kerzu e oa bet ul lid e Roazhon evit 500vet delz-ha-bloaz dimeziñ Anna Vreizh (19.12.1490) gant Impalaer Bro-Austria, Maksimilian Kentañ, d'an 19 a viz Kerzu 1990.

K'ar Foujera, hi, a lido war an ton bras etre ar 7 hag ar 15 a viz Eost, en he c'hastell, mar plij deoc'h, 500vet delz-ha-bloaz dimeziñ (dre rat) Anna Vreizh gant Charlez VIII, roue Frañs. Kinniget e vo gant Michel Philippe, aozour-choariva, an abadenn "Anne de Bretagne, le plus beau parti d'Europe" d'an arvesterien. Friko a vo bap noz a-raok pep abadenn ... hap mezh, na vezh !

Adc'hav war an istor Nevenoe, kentañ RI Breizh, a'z eas d'an Anaon e Vendôme, d'ar 7 a viz Meurzh 851.

Diwar goulnenn Dalc'homp Soñj, Kevredigezh Istor Breizh, asantet he deus Ker Vendôme reiñ an anv Nominos d'unan eus he straedoù nevez hag asantet he deus ivez lakaat ur blakenn da zerchel soñj eus marv ar ri breizhat eno. A-benn kaout arc'hant evit paeañ ar blakenn-mañ e vez goulnennet get Dalc'homp Soñj d'ar Vretoned kar o istor, reiñ o skodenn.

Ar arc'hant a zo da gas da : D.S. Danvez Breizh, BP 251, An Oriant CEDEX. Kaset e vo ul lizher-diskarg evit an talhou d'ar re o devez roet arc'hant.



Gouel Broadel Breizh

a vo lidet d'ar Sul 9 a viz Even e Ballon - Tachenn Istorle - Emgav dirak delwenn Nevenoe e Baen an Oust da 11eur. Kraistez : prezegenn ha pred en ostaleri Mari Glazioù. Goude kraistez : Gouel ha standoù war dachenn an Emgann e Ballon.

CARN

A link between the Celtic Nations An emskiant etrekeltiek

Tost da 30 vloaz 'zo eo bet savet ar C'Hevre Keltiek a-benn tostaat emsavioù broadel ar c'hwec'h bro geltiek. Gant krouidigezh ar gazetenn e 1973 e voe startaet al liammoù hag an eskemmen menozioù.



En niverenn 73 an nevez-amzer-mañ e kavor da lenn keleier diwar-benn raktresoù plantañ listri-spluj d'arc'hanel aet re gozh bremañ e bareoù Bro-Skos. Ha petra a c'hoarvez e kostez du-mañ, e Breizh, gant listri-spluj eus remziad ar "Redoutable" ? Hekle a zo eus labour pouezus ar C'Hevre Keltiek war an dachenn etrevroadel a-enep da c'hoari al listri-spluj e morioù Iwerzhon ha Keltia a gustom lakaat en arvar buhez ar besketarierien (100 den lazhet dre walzarvoudoù).

Deskiñ ur yezh en ur c'hoari : 75 strollad-c'hoari gouezelek a vod bremañ 1200 bugel (dindan 6 vloaz) ; meret e vezont gant kenreizhad an deskadurezh foran dre hanterouriezh kuzulioù ramvro Bro-Skos (pennad e brezhoneg).

Un dibab keleier berr keltiek e kembraeg (pigion celtaidd) hag e saozneg : en o zouez Eisteddfod Broadel Kembra (d'an 3-10 a viz Eost) hag un Abarystwyth Celtic Summer School : istor, sevenadur, iwerzhoneg, kembraeg ha brezhoneg. Pelec'h kejañ ouzh kelted all e Londrez ?

Iwerzhon : Frankiz a-benn ar fin, goude 17 vloaz en toull-bac'h saoz, evit ar 6 eus Birmingham : didamallet, evel reoù Vincennes ... N'eo ket echu gant ar

slour evit kaout ur skinwel gouezelek er Gaeltacht : daou zan kondaonet da baeañ telloù-kastiz gant gouarnamant ar Republik. Ul levr da lenn : "The Cultural Conquest of Ireland" (Marcier Press), gant Kevin Collins, ezel eus ar C'Hevre Keltiek. Anvioù-lec'h : kaout ul lennadur keltiek ha reishoc'h (menez The Sugarloaf -an Dorzh-Sukr- hiziv c'hoazi er Republik, e-lec'h Sliabh Uallain, da skouer).

Skourr Manav ar C'Hevre a glemm war amzalch amskiaer gouarnamant emren anez Vanav e-pad brezel Pleg-mor Persat. Ha kelennet a vo manavag goude embannidigezh un enklask a ziskouez penaos eo stank an dud a soñj dezho e tlefe bazañ atreet evel un danvez studi ? Diwall ha difenn an endro, setu ur gudenn vat all a savo e-kerz an dilennadegoù hollek e Manav er bloaz-mañ.

Al lodenn vrasañ eus ar pennadoù embannet gant Carn a zo e saozneg (brush up your English, tudoù). Brezhoneg yaec'h a vez ivez er gazetenn. Dre vras e konter ur bajennad da vihanañ e pep yezh keltiek.

Plijet a rafe deoc'h moarvat gouzout hiroc'h war al labour hag arakadennoù an emsavioù keltiek ha degemer ar gazetenn disheñvel-rik-mañ peber gwech ar bloaz. Koumanant, da gaout an niverenn 73 a-raok pell, ha skrivit da Youenn Craff, Talbodiak, 29300 Bai, ha kasit da heul ur chekenn a 70 lur war e anv.

Bep daou viz lennit

AL LANV

59 hent Kerdoniou Vihan 29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur Skoazell adalek 130 lur

Naoned e Gouel "Serr-noz Roazhon" '91

Liammetre div gêr vrasañ ar vro.



Evit ar wech kentañ e vo ur sonadeg rock a-doug abadennoù ar serr-noz Roazhon. Ar "Pogues" an hini eo a roio lañs d'ar gouel a grogo d'an 29 a viz Even evit echuiñ d'ar 6 a viz Gouere. Un dra all a vo a-bouez ivez er bloaz-mañ. Dibabet ez eus bet un tom : "Inizi ha Porzhioù", a roio tro d'ar Roazhoniz ober gwelloc'h anaoudegezh gant Naoned. Tu a vo da welet un diskouezadeg gant Kreizenn Naoned ar Sevenadur Mor diwar-benn bed ar bigi-kenwerzh hag ar bigi-brezel. Tu a vo ivez da ober un tañva da gegin Naoned, Gobanioù Naoned a zeio da Roazhon dre an Erzh, kanol Naoned-Brest hag ar Wilen ...

A-hend-all e vo tu da glevat an arzoerien-mañ e-kerzh ar gouel : Mory Kante, Malavol, Joe Zawinul, Gilles Servat, Dan ar Bras, al Laz-Seniñ jazz broadel ... ur pezh-c'hoari gant Strollad ar Vro Bagan "La passion celtique".

Sac'hig : siwazh ! o paouez klevet emsomp ne vo ket posubl da strollad "The Pogues" dont da Roazhon evit Gouel Serr-Notz Roazhon. Kalz a dud e vo dipitet ...

Levrioù

Deuet eo er-maez Gallou, ul levrig 32 pajennad e liv hag e brezhoneg. Istor ur bugel evit ar re yaouank. Priz al levr : 30 lur gant mizou-kas. Skol Vreizh, 6 str Hir, 29600 Montroulez

Ur benveg talvoudus d'an holl

An distro

Panas eo bet savet Evit Ar Brezhoneg ?
 E 1972 emañ Claude Henry, kelennar war ar saozneg e Skol-Vaur Roazhon, e Edimborough, Bro-Skos. Goulenn a raer digantañ ober ur brazegenn diwar-benn Brezh. En em rentañ a ra kont hag en 36 vloaz, ganet e Plouidi, e-kichen Gwengamp, brezhonegerien a dud, ne oar netra diwar-benn e vro hag he sevenadur. Klask a ra, lenn a ra levrioù diwar-benn Breizh (levr Morvan Lebesque "Comment peut-on être breton ?" dreist-holl a vo pouezus evitañ) ha dizoloiñ a ra ar gevier ofisiel. Droug a zo aet ennañ e weloù pegen dizek e oa, hag en ur "den desket" koulskoude, war istod ha sevenadur e vro. Kompren a ra pegen pouezus e vez ur yezh evit ur bobl ha divizout a ra ober un dra bennek : krouiñ ur gazetenn divyezhek. A-benn Neddeg 1972 e felle dezhañ lañsañ "Evit Ar Brezhoneg", met ne oa ket prest an traoù. Distroet da Vreizh e krogo adalek miz Gwengolo 73 d'ober emvod, un tammig e pep lec'h e Breizh evit kinnig ar pezh en doa c'hoant ober. Da gefver unan eus an emvodoù-se e kejo ouz Jean-Michel Tilly, rener Kreizenn Sevenadurel Gwengamp, ha gant sikour an dud e zafempred ar greizenn e vo lañset ar gelaouenn a-benn Neddeg 73. Un niverenn 0 a vo tennet 32 000 skouerenn anezhi ha karget ar 700 reou yaouank (eus 14 da 20 vloaz), bet kavet gant Claude Henry da gefver e emvodoù, da reiñ 40 skouerenn pep hini d'e familh ha d'e vignoned. Evel-se ez eus bet distruet 5200 komanant a-benn miz Ebrel 74. 10 lur e sikour ar gelaouenn.
 Aesoc'h eo bet an traoù dre ma oa krog, d'ar mare-se, ar skolioù da zigeriñ o dorioù da sevenadur Breizh ha dre ma oa Claude Henry e-unan kelennar ez eo bet degemeret mat "Evit ar Brezhoneg" e metoù an deskadurezh.

Peseurt pallioù e oa re Evit ar Brezhoneg ?
 Diskouez d'ar vrezhonegerien e oa ar brezhoneg ur yezh ken talvoudus hag ar re all, lakaat anezho da lenn o yezh, en ur ober al liamm etre ar brezhoneg komzet hag ar brezhoneg skrivet, o reiñ dalc'hmazh ar plas kentañ d'ar brezhoneg komzet (setu p'arak e veze implijet enrolladennoù da zanvez d'ar pennadoù). Ne oa ket divyezhek ar gelaouenn e gwirionez, ne vez ar galleg aze Ha tizhet eo bet ar pal-se ?
 Er penn kentañ a-dra-sur : e 1975 e oa 3600 komananter, 4200 e 1976 war-lerc'h an emvod meur bet dalc'het e ti Alan Stivell hag en deves asantet bezañ rener ar gelaouenn. Goude-se e tigaske niver ar goumanterien betek 2000 : n'eus ket bet graet enklask ebet evit gouzout piv a chome komananter, met skiaer a-walc'h eo e oa muioc'h evit tud an Emsav pa oa 4200 komananter ha moarvat hon eus kollet darn eus ar vrezhonegerien "hengounele" p'hon eus paozezet a vont da welet anezho da vare an adkomanant (dre skrid e veze ret komanantñ neuze).
 Ret eo menegiñ a oa Evit ar Brezhoneg neptu e-kefver politikerezh met tost-tre memestra ouz buhez ekonomiezh Breizh. Gouestlet e oa bet an niverenn 2 da harz-labour micherourien ti Doux e Pedernez ; goude-se e vo pennadoù-koaz diwar-benn ar stourm a-enep kreizenn nukleel Plogorzh pe diwar-benn lanv-du an Amoco e 78.

Panas eo ar gazetenn en-dro ?
 Er penn-kentañ e veze kaset an traoù en-dro gant tud Bro-Dreger dreist-holl, Marcelle Kara, Doming Jestin, hag un nebadud tud all eus Kreizenn Sevenadurel Gwengamp ; ganto e veze enrollet krouet gant Turlav Ar Menteg ha graet e veze ar vaketenn gant Henri Hillion, o-daou menech e abati Run Meno, er C'Hozh-Marc'had (e-kichen Plouared) hag evit echuiñ e veze embannet Evit ar Brezhoneg e li-embann Copie 22, dalc'het gant Aotrou Person Pedernez, Yves-Andre Ar Gall, Adalek war-dro 1976 e vo krouet ur post kelaouenner a vo kemeret gant Harva Ar Beg, sikouret gant Doming Jestin betek 1978 hag e-unan da c'houde. Ar c'houtoù a veze graet war o zro gant J.M. Tilly hag al labour sekretouriezh gant an Ao. Michel hag e wreg, mistri-skol war o leve o chom e Plouavgor. Gwerzh e veze ar gelaouenn dre goumanterioù hag a-hend-all e veze lakaet ar gwerzh en un nebeud stalioù-levrioù.

Pere eo perzhioù mat Evit ar Brezhoneg ?
 Kinnig pennadoù en ur brezhoneg piviñdik hag euen war un dro hag o tennañ da vuhez an dud e Breizh ; pennadoù war ar micherioù, war ar stourmoù, re ar gevredigezh kouls ha re ar sevenadur, h.a. Implijet eo bet Evit ar Brezhoneg ivez evit kelenn brezhoneg : resevet hon eus bet lizhiri gant tud o trugarekaet ac'hanomp peogwir o devoa peuzsaket ar yezh a-drugarez d'ar gelaouenn.

Gwanderioù Evit ar Brezhoneg ?
 Gwanderioù Evit ar Brezhoneg a oa re ar brezhoneg, da lavaret eo bezañ rediet da stourm ouz ar sevenadur ofisiel, ouz pouez ar galleg e gevredigezh. Gwan e oa ivez, marteze, dre ma oa chomet un tammig "amateur", e-kefver ar gwerzhañ dreist-holl. Ha gwan abalamour d'an archange : tammoù sikourioù a zo bet digant ar "Charte" sevenadurel da skouer, met start e veze d'erc'hel, pe e vije bet reiñ lakaet keroc'h ar c'homanant ha neuze n'hon dije ket gallet tizhout al lannenierien hon doa c'hoant mirout, ar vrezhonegerien hengounele.
 Kontant bras eo skipallh kentañ Evit ar Brezhoneg o weloù eo adlañset ar gelaouenn gant ur strollad nevez, c'hoant ganto mirout bev ar brezhoneg, kontant o weloù anv Evit ar Brezhoneg war ur gelaouenn, kontant da weloù tud o lakaet o nerzh da zifenn ar memes stourm.

Kelennnoù bet kemeret da gefver un endevzad "televorenoù" o vedañ Claude Henry, Jean-Michel Tilly ha Doming Jestin (hag o friedoù) d'an 23 a viz Ebrel 1991).

Utopia e Brezhoneg

Troet eul al latin gant Fañch Morvannoù - embannadurioù Skol Vreizh - Planedenn niv 31-32-33 Priz : 120 lur an tamm. Skol Vreizh, 6, str Hir, 29600 Montroulez.



"De optimo republicae statu, deque nova insula Utopia vera aures, nec minus salutaris quam festivus, clarissimū disertissimūque viri Thomas Mori Inclitae civitatis Londinensis civis et Vicecomitis" ...
 Da lavaret eo, ar yezh vrezhoneg : "Ar gwellañ stumm kumuniezh politikel a zo, hag enezenn nevez Utopia : ul levr hag a dalv aour evit gwir, ken plijus ha ma 'z eo eur, gant an den brudet hag helavar meurbet Tomas Mor, keodedour ha besprovost ar gêr vrudet a Londrez". Evelse e tigor trade embannadur an Utopia, hini Basel (1518) ...

Ganet e 1477 pe 1478, e Londrez, ez eo bet Tomas Mor unan eus hanlennegourien ar Azginivelezh, gant Pico della Mirandola, Gwilherm Bude ... ha dreist-holl ar Roterdamad Dider Erasm ; baz' e oa heañ mignon bras d'hon Londrezad, Alvakad, dimezet, hag ad dimezet goude marv e wreg kentañ, pemp a vugale dezhañ (hep ober ar gont eus ar re a varvas bihanig), e teuas Tomas Mor da vezañ Katseller-meur rouantelezh Vro-Saoz, e 1529. D'an ampoent e oa Henri VIII a Vro-Saoz war ar gador-roue. Falout a reas dezhañ dibriediñ, hag en am lakaat , eh, e penn liz Vro-Saoz. Ne c'halle ket ar c'hatolik-roman Tomas Mor asañitñ da gemense. Toullbac'hat e Tour Londrez e miz Ebrel 1534, e chomas ennañ betek ma voe dibennet (06-07-1535).
 Ugent vloaz a-raok, e oa Tomas Mor o skrivañ an Utopia, e latin ... N'eus, al levr, netra o reiñ da c'hrouzout pe da zivoutout pehini o vefe marv ar skrivagner ... Arabat soñjal e vefe Utopia Tomas Mor un "utopienn", un huñvre na vo anezhañ biken e gwirionez ; diwar farsal (kalz) e tiskouez ar skrivagner ar pezh a zo brin en darempredoù o deus an dud kenetrezo war an tamm douar-mañ, met kinnig a ra ivez diskouli-mañ : ma 'z eo ret cheñch frammoù ar gevredigezh, ez eo ken rei all, ma n'eo ket retoc'h, pareañ kalon mab-den ...

Kemennadenn

Embannadurioù Beltan-Lagon Bleu a lak an dud da c'hrouzout e c'hellje bezañ kasedigoù fall e-touez ar re a zo deuet ar-maez gant Bernez Tangi dindan anv "Kest al Lec'h", enrollet hag allenrollet ganto.
 War a gav dezho, un dredenenn eus ar bandennoù implijet ganto (danvez-orin ar bandennoù) a vije fall (mergiel ? kaset int da zifennañ).
 Embann a reont skiaer d'an dud ez eus tu dezho eskemmañ ar c'hasedigoù-se evit kaout an

embannadur nevez o skrivañ da :
 "Lagon Bleu, embannadurioù Beltan, 29630 Ar Foullhez".
 O'hoant o deus remenet al Lagon Bleu da 'n em zizpezañ evit ar brud degaset gant ar gudenn-se d'ar c'haner, d'ar sonerien ha d'ar micheroureler J.J.Baillard, peogwir labour hag a zo unan eus ar re bijusañ embannet nevez deoc'h o pelligomz d'an niverenn 98 99 66 78.

Sonskridaoueg Marvailloù

Nevez lañset ez eus gant Mikael Madeg ur rummad embannadurioù moulet hag embannet gant Emgleo Breiz, hag a zo arvet Marvailloù.

Daou rumm a gaver enno :
 1. Testennoù sonskrivet (enrollet) e-touez brezhonegerien a-vihanig. O fal eo, e-ser didiñ, sikour an nevezvrezhonegerien, hag an holl o deus c'hoant peuzsakiñ, da

-gompen an holl rannyezhoù brezhoneg, -hefvelaat o brezhoneg ouz hini a-viskoaz e-fed fonologiezh dre-vras. An testennoù-mañ a zo bet skrivet da c'houde, e brezhoneg ledan ar yezh skrivet.
 2. Testennoù lennet gant brezhonegerien a-vihanig, peurliesañ skrivagnerien o lenn o oberennoù dezho o-unan, met ivez, pa 'z eo aet ar skrivagnerien da anaon, gant tud a oa o rannyezh hini orin ar skrivagner, tost da vat.

Er rumm Lennadennoù e kaver ar c'hasedig hegen ; an destenn no bet moulet d'ija e lec'h all.
 Nnn 1 : an Tad Medar (eus Lanarvil), o lenn lod eus istorioù "Diwar c'hoarzin" ; nnn 2 : Maria Prad (eus Barlewan, Bro-Dreger) o lenn diwar "Un toullad kontadennoù" gant ; Paotr Jég (eus Evlaz Bro-Ouel), o lenn diwar e levr "E-dro da Vanter Sant Jég" ; nnn 4 : Tri C'Harnevad (Koulliz Kadez, aus Sant Koulliz, Yann Yeun ar Moug eus Gouezeg, Loeic Ropaz eus Poullouen) o lenn 6 danevell diouz levr Jakez Riou "Geotenn ar Werc'hez".
 Ret eo lakaat 15% ouzhpenn evit ar miz-ou-kas pa vez paeet nebeutoc'h eget kant lur a varchadouriezh. Pasañ dre chekenn war anv Miesdou, ha kasit da : Miesdou, 4065, ru ar republik, 29200 Brest.

Taolenn

Table listing various items and their prices: Lzhirri, Diwan, Ammerzh, Berr ha Berr, Yezh, Europa, Istor, Palestina, Hawal, Etrebroadel, Latvia, Sokial, Gouezleg, Istor Breizh, Emskiant etrekeltiek, E.A.B., Embannadurioù, Gouelioù.

Ar pennadoù gant Per al Lez, Andrew ar Bras, Kristen, Joel Donnart, Y.V. Thorel, Y.F.K., Yann an Douar, E. Riou, Lena Louarn, Jili Boucherit, Ronan Barvek, Dazont, I.K., M.K., Robert Baxter, Alan Heusaf.

Labour difaziñ gant : Olier ar Mogn ha Nikolaz Davalan.


Maketenn gant Jean-Michel Roynard ha Lena Louarn

Luc'hskeudennoù gant J.M. Roynard, O.F., Times, Glenn Jegou, Nouvel Obs. ha Lena Louarn.

Tresadennoù gant Nono ha P. ar Marcheg.

Renerez BREMAÑ : Lena Louarn .

Skrivet e-barzh BREMAÑ ! Kasit ho pennadoù, luc'hskeudennoù, war baper, pe pladennig a-raok al Lun 1añ a viz Gouere .



Ar produñ danvez pedagogel Diwan prest da werzhañ he skiant-prenet

Abaoe meur a vloaz dija ez eo bet boucl'het an erv war dachenn ar produñ danvez pedagogel e Brezhoneg gant Diwan. Gant digoradur an eil derez ez eo aet an traoù war-raok buanoc'h dre ma oa bet frammlet al labour. Tost da 100 den o deus strivet ha kaset da benn al labour, un dek bennak evit pep danvez (saozneg, matematik, skiantoù, gallek, h.a.), tro-dro da Lukian Kergoat, kelennner e skol-veur Roazhon.



Ezhommoù divent da seveniñ

Rabat kredif evel-just e oa pep tra da skrid, lastennoù lennegel e-leizh, pennadoù ispisalizet. Ur sakre klaostr e oa koulskoude dont a-benn da sevel programmoù klok evit pep danvez eus un tu ha geriaouegoù deus an tu all. Deut eo Diwan a-benn avat da lakaat da zont er-maez seizh geriadurig, da lavarout eo 10 000 gor. An hini a sell ouzh an urzhiaetezh a zo teiryezhkek zoken, brezhoneg-galleg-saozneg.

4 milion a lurioù nevez

Met daoust d'ar gellennerien labourat a-youl-vat, ez int tud a-vicher, ha mard eo diaes jediñ koust an holl labour-se, ez eus bet displeget gant Daniel Karmalegenn e sav ar choust da ouzhpenn pevar milion a lurioù nevez da nebeutañ. Pouezañ a ra war budjet Diwan ha n'eus den all ebet o krouiñ

ar programmoù ret ivez evit ar skolioù divyezhek publik pe katolik.

Ur gevredigezh a servijo d'an holl


N'eus ket tu da genderchel evel-se e-pad bloavezhioù c'hoazh. Setu perak he deus divizet Diwan mont e darempred gant ar rektoriozh. Ar pal : krouiñ ur gevredigezh enklask ha produñ danvez pedagogel hollek a vefe kemeret e-karg gant ar rektoriozh e-keñver archant. Da zwall zo avat evit dont a-benn da zerehel ur skipailh mat rak perak cheñch tud hag a ra labour a-feson.

Ma ya mat pep tra e vo skañvaet ar budjet sur, met ur goulenn a chom c'hoazh : daoust hag e vo kavet atav tud barrek e-leizh pa vo aet skuzh lod diouto gant o sammad labour rak un dra zo anat, gwelloc'h eo kaout skiant-prenet ur skipailh ledan eget kontañ war daou pe dri den, ha pa vefent implijet amzer leun.

Elena Riou

Deut eo er-maez kasedig nevez ar strollad E.V. '6 octobre' eus hec'h anv war o label Gwenn Kivi. Enrollet e oa bet an eizh kanaouenn war leurenn an Olympic Cinema e Naoned d'ar 6 a viz Here eveljust gant studio Enter/Arpege eus Naoned. Skignet e vez dija gant CRAI e Bro-Gembre evel Shamaani ar gasedig ziwzhañ. Filmet eo bet ar strollad E.V. o redok hag o tañsal e straedoù Portmeirion, kêrnadenn gembre brudet

mat 'walc'h a servijo evit ar film tele 'mojenne' 'Le Prisonnier' (e galleg). Diskouezet e vo ar c'hlip-mañ deiz pe zeiz e Breizh. Evit ar mare ez eus tu da brenañ ar gasedig-mañ dre lizher ouzh ur c'henn 80 lur mui 7,4 lur evit ar frejoù-kas. Kast 'ha da : E.V., 4 hent-dall Vignolles, 44000 Naoned. Evit muioc'h a geleier, pouezit war stokleg ho minitel : 36 14 kod Chez'EV.



Na zisoñjit ket goulenn diganaomp, a-raok mont kuit da vakañsiñ, T-Shirtoù e Brezhoneg I (ment standard) (danvez start ha brav) "Amzer zo ! Gant ma pado !" (Gwenn, tresadenn zu) "Labour Sul, Labour nul !" (Gwenn, tresadenn zu) "Arc'hoazh e paoezin d'evañ !" (Gwenn, tresadenn liv) "Evit stourm ouzh ar sec'hour, evit ho pastis dizour !" (Gwenn, tresadenn wer) - 80 lur an t-shirt gwenn ha nevez deurt er-maez ! Un t-shirt du (kaer !) : "Ar galleg eo karr an ankoù e Breizh" Reparz Hemon, (frazenn istorel !). Skrid gwenn a-gleiz, 100 lur an tamm. Posubl eo deoc'h skrivañ d'ho mignonad gant ur c'hreion-stoub (tog liv) "Skrivañ a ran e Brezhoneg" 10 lur an tamm, ha kas ho lizhiri e goloioù ment-hir gwenn pegus. "Amzer zo" pe "Labour Sul" 10 lur ar paskad 10. Hag evit klinkañ brav ho c'hupenn a-raok kuitaat ho pro, na zisoñjit ket stagañ ar spienn nevez ("Pin's") "Breizh, ur bob", 15 lur an tamm. Da brenañ e stal Skol an Emsav, 8 straed Hoche 35000 Roazhon, 99 38 75 83 (bemdez betek 6 eur) (frejoù-kas : 15%)

Gouel bloaz Monterfil - 29/30 a viz Even Kroaz-hent sevenadur Breizh Uhel

Kinnig a ra daoc'h hengounel ar vro, dañsoù ar vro, sonerezh ar vro a vez kinniget d'an dud dibaoe krouidigezh ar Gouel-mañ (er bloavezh 1976) ha miliadoù a dud a vez bep bloaz o tistreiñ da adkavet gwiriennoù o bro.

DIWALLIT ! BEZ HOR BO UR SKINNEZ E BREZHONEG. SABIA. "Bez hor bo ur skinwel e brezhoneg" Roc'h Tredudon 14 a viz Gouere. Pik Nik bras Stourm ar Brezhoneg

Pladenn nevez ar Bleizi Ruz

Deut eo er-maez c'hwec'hvet pladenn ar Bleizi Ruz, d'ar izelvroioù ha da Vro Alamagn (Kiel, Frankfurt, Stuttgart...) da gentañ ha da vro Aostria, Italia, Helvetia un tammig diwezhatoc'h. Treman a raint ivez dre Vro Saoz ha dre Vro Gembre e miz Mae, amzer dezho da gamer parzh e-barzh abadennoù skingomz ha skinwel du-se. Tro hor bo da welet anezho e Breizh e-pad an hañv memes tra, da skouer e Brest d'ar 15 a viz Eost da geñver "Yacouezhoù ar Porzh". Ra kendañcho eta ar Bleizi Ruz da yudal e-pad triwech bloavezh kanet gant Frañk Ewen, all e Breizh ha dre ar bed !



Yaou 6 a viz Even da 9 eur noz Fast-noz vras an Nevez Amzer gant Bleizi Ruz Roazhon Carrefour 18 Aozet gant UPRACB - Unvaniezh kevredigezhioù Bro Roazhon -



Groñvel d'an 8 a viz Even Fast-noz Skoazell da Skol Veur Kreiz Breizh gant : Ar ra yaouank Breudeur Morvan Thomas-Philippe Jouve-Marchand Puihandre-Stervinou Hetet-Le Goff Tallec-Skraign-Leclerc Le Lay-Pirou Aozet gant ar strollad labour evit ar S.V.B.I. ha Kaf ken-gradit Breizh

DIWAN EN UN HENT-SAC'H

Manifestadeg vras
Sadorn 22 a viz Even
Kemper

